

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

73. DAOU ZEN AMAN EN EUN TI

(follennoù 224 - 226)

Daou zen aman en eun ti
en eum gar a galon.

Sujet int dar goal deodou
Souffr a reont eb rezon.

Ar goal deod eus ho goelet
ho ren ho iaouankis
A deu da teli bilim
Karget deus a valiss.

Kaer en deveus eur goal deod
Pikat din va halon
Biken ne abandonnen
eur plac'h ken a fesson.

Karet e ran va mestres,
Karet e zon gati
ia dre ma deveus furnes
Speret a koantiri

A zindan ar firmamant
Na kaffei ked he far
e daoulagad zo brillant
evel an eol pa par.

Ne sorti deus he guinou
Nemet komzo prudent
Komzo kaer er veuleudi
eun air bepret kontant.

Skrivet e meus lizeri
evid he hassuri
he c'horv a zo en treguer
Va speret zo gati.

Va speret deus he frezanss
A rejouiss va c'halon.
Allas! hi zo en Treguer
A me zo en Leon.

Va speret deus he frezanss
Na sortio james
Mar mank da zond d'am c'haret
hi vezo treitourez.

Diveza ma ne goëlis
e voa er vadalen
a dostik da Vontroulez
eur sulvez o pourmen.

Enon me promettas
Dei fidelite
Teuchen pebred d'hi c'haret
petek fin va bue.

I a promettas ie
Komzo kaer en faveur
Ma na chench a santiment
Me kred em bo ar bonheur.

evid beza gonezet
amitie ar plac'h se
Perlezen an oll verhet
Brava plac'h a valle.

vvvvv

Jannet Puill, 19 janv. 1851

vvvvvvvvvvvv